

(f° 235)

Ar Mat[er]c'hadour Rouan.

eur mat[er]c'hadour iaouank e tistrei deus a namet
en devez goulennet en an Doue beza lojet

hostis ag hostigez en an doue laret din
a c'houi e pe peadra evid rei da goagni.

- ia ia mat[er]c'hadour diskenit deud en ti
e vo laked o marc'h duman er merchossi.

- Margodik mat[er]c'hadour savid prompt deus an ec'h
Da ober e velle na d'ar marhadour kez (1).

ar vatezig vian dre ma re ar goele
ar marc'hadour iaouank nag outi a drible

Pawouezit mat[er]c'hadour komportit o ligne
a ben an' anter nos e kollod o buhe

e man ar c'hleze en noas dindan pen ar goele
n'en deo ket sec'het c'hoas goude larza e gile.

- Margodig mat[er]c'hadour prezerw din va buhe
a me er breio mestrez var pemp kant skoret leve

en an' Doue laret (2) din
a c'houi ve engajet gant plac'h iaouank e bed.

- ia, ia, margodig mat[er]c'hadour nac'h ouzit ne allay ket
Digjou voa teir sizun a boë mon eureuzet.

me a meus tri breur all e servich ar roue
o pezo margodig ar choas an neze.

(1). - Peut-être faut-il lire: ker?

(2). - Peut-être faut-il lire: larit?

380

Diviskit o poutou baleit var o leron
 e man o marc'h e mez hag o pistolenou
 mes o harc'hant a zo dindan an alchoëchou .

(f° 239)

Dre ma kane ar c'hog a ma wac'he ar vran
 e ie ar marc'hadour var treuzek a rouan
 ha en kasset gantan ar vatezik vian .

Janneton Peil, 16, juin 1851 .

Par suite d'interversion de feuillets, la fin se trouve au f° numéroté
 239, après la "gwerz" Sant Julian (f° 236-238).